



.....Ila ned out ket  
karget a estlann o welet  
ur mab hep tad eus ur vamm gwerc'h,  
ur rozenn diwanet eus an nec'h ?

(eus Levr Eurioù Anna Dukez a b-Vreizh)

Godefrin, martolod a m-Volenez, 1816

kerdu 1988

- Oferenn ar Pellgent
- Oferenn Deiz Nedeleg
- Santez Mari, Mamm Doue
- An Epifaniezh
- Eil sul K

ar  
fulenn II

Nedeleg - Oferenn an noz - Ar Pellgent

Kempedenn- Aotrou Doue, an Nozvez santel-mañ hoc'h eus karget a sklerder, gant sked an Hini a zo ar wir sklerijenn deuet er bed, Grit dimp, ni ho ped, goude bezañ anavezet war an douar misterioù ar sklerijenn-se: Hor Salver, kaout hon dudi gantañ e levez ar baradoz. Drezañ, hor Salver Jezuz Krist, ho...

lennadenn gentañ- En tu all da c'hanedigezh dost un diskennad a gendalc'ho ar renziad davidat, e kemenn Izaiaz donedigezh ur gwir vab da d-Zavid.

1<sup>o</sup> lennadenn

Ur bugel a zo ganet dimp

LENNADENN EUS LEVR A'R PROFED IZAIAS 9.27

- 1 Ar bobl hag a oa o vale en deñvalijenn he deus gwelet ur sklerijenn vras ha war ar re a oa o chom e bro skeud an noz ez eus paret ur sklerded.
- 2 Kresket hoc'h eus o laouenedigezh ha brasaet o levez; en em laouenaat a reont dirazout evel m'en em laouenaer da vare an eost evel m'en em laouenaer pa ranner ar gonidoù (an dibourc'hoù)
- 3 Rak ar yev a bouezewar o chouk ar sparl a oa war o divskoaz, bazh o gwaskour ac'h eus friket evel un deiz Madian.
- 4 Rak pep botez a wisker evit ar brezel pep mantell bet ruihet er gwad a vo taolet en tan hag a vo deuet.
- 5 Rak ur bugelig a zo ganet dimp ur mab a zo roet dimp; War e zivskoaz emañ merk e c'halloud hag anvet e vo : Kuzulier Burzhodus, Doue Kreñv Tad Peurbadus, Priñs-ar-peoc'h.
- 6 Astenn a ray e veli en ur peoc'h hep fin evit tron David hag e Rouantelezh, evit hen diazezañ hag hen startaat dre al Lealded hag ar Justis adalek bremañ ha da viken. Setu aze oetra 'rain karantez didrec'hus an Aotrou, Mestr ar bed.

SALM 96 1-2a, 2b-3, 11-12, 13

Diskan ( Lk 2, 11)

R Hiziv ez eus ganet dimp ur Salver Henezh eo ar C'hrist, hon Aotrou.

- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez  
Kanit d'an Aotrou, douar a-bezh  
Kanit dezhañ m'ar-ye e anv.
- 2
- 2b Brudit a zeiz da zeiz ez eo hor Salver  
Kontit e c'hloar d'ar Poblou  
D'an holl vroioù e oberoù burzhodus.
- 3

Nedeleg - Oferenn an noz - Ar Pellgent

12 na savino ar maezioù ha kement ha kement 'zo enno  
(Ra gano holl wez ar c'hoadoù)

13 Dirak an Aotrou, rak o tonet emañ  
O tonet emañ evit gouarn an douar  
Gouarn a ray ar bed gant reizhded  
(hag ar poblou hervez ar wirionez)

eil lennadenn- Ur road digoust eo ar c'hras. Doue a ro dimp Jezuz hep digoll e-bet. Dre garantez hag evit netra. O sellout ouzh Jezuz e c'hellomp dont da vezañ Pobl mignoned Doue.

2<sup>o</sup> LENNADENN

Medefezh ha karantez an Aotrou Doue o'n em ziskouez d'an dud.

LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA DITOZ Tit. 2, 11-14

- 11 En em ziskouezet eo bet gras Doue evit silvidigezh an holl
- 12 dud, ha deskiñ a ra dimp dilezel an direlijion ha c'hoantegezhioù ar bed ha bevañ neuze ar vuhez-mañ gant furnez, justis ha devosion,
- 13 e-pad m'emaomp o c'hortoz an esperañs evurris ha m'en em ziskouezo gloar hon Doue bras ha Salver, ar C'hrist Jezuz;
- 14 EA hag a zo en em roet e-unan evidomp, evit hon dasprenañ eus a bep fallagriezh, hag evit glanaat evitañ e-unan ur bobl dezhañ e-unan, gredus evit an oberoù-mat.

ALLELUIA

Alleluia (bis)

Lk. 2, 10-11

Degemenn a ran deoc'h kelou ur joa vras :  
ganet ez eus bet evidomp hiziv ur Salver.  
Ar C'hrist, hon Aotrou. Alleluia!

AVIEL

Hiziv ez eus bet ganet dimp ur Salver.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 2, 1-14

- 1 En deizioù-se e voe embannet ur gourc'hemenn a-berzh a-Herzh Kaezar Aogustus evit ober ar roll eus holl dud an douar.
- 2 An enskrivadag kentañ-se e voe graet p'edo Kurinus gouarnour Siria.
- 3 Mont a rae an holl-da vezañ enskrivet, pep hini d'e gêr.
- 4 Jozef a bignas eus Galilea, eus kêr Nazared da Vro-Judea, betek kêr David anvet Betlehem, o vezañ ma oa eus tiegezh ha bro David, da vezañ enskrivet gant Mari e bried hag a oa o tougen.
- 5 Hag e-pad m'edont eno e teuas eviti an amzer da c'heneal he bugel hag e c'hanas he mab kentañ-ganet;
- 6 e vaithurañ a reas hag e lakaat a reas en e c'hourvez en ur prezeb, dre ne oa ket a blas evito en osteleri.
- 8 Bez'e oa mesaerien er c'hoiad-se er parkeier hag a veilhe e-pad an noz da ziwall o loened.
- 9 Un Ael d'an Aotrou a baras dirazo ha gloar an Aotrou a skedas an-dro dezho:

Nedeleg - Oferenn an noz - Ar Pellgent

- spontet bras e voent.
- 10 Mot an Ael a lavaras dezho : «Na spontit ket,  
rak setu ma legemennan deoc'h ur c'heloù-mat hag a roio levenez  
vras d'an holl bobl.
- 11 Ganet ez eus bet deoc'h hiziv, e kêr David, ur Salver  
hag a zo ar Mesiaz, an Aotrou.
- 12 Setu ar sin evidoc'h : kavout a reot ur bugelig mailhuret  
ha gourvezet en ur prezeb.»
- 13 Hag en un taol, ec'h en em unanæs gant an Ael  
ur bagad bras eus armead an neñvoù o veuliñ Doue hag e lavarent
- 14 Glop, e lein an neñvoù da Zoue  
ha war an douar peoc'h d'an dud a blij dezhañ.»

war ar profoù - Ra blijo deoc'h, Aotrou Doue, hon aberzh, da gefiver ar Gouel-mañ.  
Ha grit, dre c'halloud an Oferenn-mañ, ma teuimp da vezañ heñvel  
ouzh ho Mab a zo ennañ hon natur-ni unanet ganeoc'h: Jezuz Krist, hor Salver. Amen

rakkanenn-veur - prefas Nedeleg - E guirionez, Tad santel, Doue hollc'halloudek  
ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep  
lec'h hag e pep amzer. Rak dre vister ho Mab en em c'hraet den, hoc'h eus lakaet  
sklerijenn ho kloar da barañ dirak hor spered, gant ur splannder nevez. Ha bre-  
mañ, paz anavezomp Doue dindan an natur-den a welomp, ez omp douget gantañ da ga-  
rout ar pezh na welomp ket. Rak-se, unanet gant an Aeled hag an Arc'haeled, ha  
gant holl Speredoù galloudus an Neñvoù, e kanomp meuleudi d'ho kloar, en ur lava-  
rout da viken:

goude keduniñ - Ho pediñ a reomp, Aotrou Doue, ni hag a zo dudi ennomp da ober  
Gouel Ginivelezh hor Salver, ma c'hellimp, dre ur vuhez vat, gou-  
nit ar c'hbras da vezañ unanet ha da vezañ lodek gantañ da viken. Eñ, Jezuz Krist  
hor Salver. Amen!



Nedeleg - Oferenn an deiz

kempedenn- Aotrou Doue, c'hwi hoc'h eus krouet ken kaer natur mab-den, na kae-  
roc'h c'hoazh hoc'h eus he savet a-nevez. Grit dimp, ni ho ped, kout  
perzh e buhez Doue, an Hini a zo plijet gantañ kemerout hon natur-den: hor Salver  
Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou, Doue bev ganeoc'h ha gant ar Spered Glan ...

lennadenn gentañ- Ar silvidigezh degaset gant Doue n'eo ket hepken evit hinien-  
noù - Hizhout a raio pennoù-pellañ an douar.

1an LENNADENN

Holl harzoù an Douar e welo silvidigezh hon Doue

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED IZAIAS

52. 7-10

- 7 Pegen kaer war ar menezioù  
treid an hini a zegas keloù-mat,  
a embann ar peoc'h  
a zegas an eurvad  
a zegemenn ar silvidigezh  
a lavar da Sion : «Emañ da Zoue o ren !»
- 8 Ur vouezh! Da c'hedourien o deus savet o mouezh  
holl a-gevret e laoskont kriadennoù a levenez,  
rak gwelout a reont dindan o daoulagad  
an Aotrou o tistreiñ da Sion.
- 9 Laoskit holl a-bouez-penn youc'hadennoù a joa,  
C'hwi, dismantrou Jeruzalem  
rak an Aotrou en deus dic'h lac'haret e bobl  
dasprenet en deus Jeruzalem.
- 10 Diskouezet en deus an Aotrou e vrec'h Santel  
dindan selloù an holl vroadoù,  
hag holl harzoù an douar a welo  
silvidigezh hon Doue.

SALM 97 1. 2-Jab. 3cd-4. 5-6

R Gwelet o deus harzoù an douar  
Silvidigezh hon Doue.

- 1 Kanit d'an Aotrou ur c'hentik nevez  
Rak traoù burzhodus en deus graet  
An trec'h a zo bet gonezet dezhañ gant e zorn dehoù  
Ha gant e vrec'h santel.
- 2 Diskuliet en deus an Aotrou e silvidigezh  
Dirak ar pobloù en deus diskleriet e reizhded
- 3a Soñj en deus bet eus e vadelezh hag eus e fealded  
3b E-keñver Israel.
- 3cd Gwelet o deus holl bennoù an douar  
Silvidigezh hon Doue.
- 4 Youc'hit d'an Aotrou, douar a-bezh  
A-bouez-penn, gant safar ha soniri
- 5 Kanit d'an Aotrou gant an delenn  
Gant an delenn ha mouezh ar muzikou  
Gant trompilhoù ha son ar c'horn  
Youc'hit gant levenez dirak ar Roue, an Aotrou.

eil lennadenn- Komzet en deus Doue a-hed an Istor. A-hend-a-hi, gant piv e vefe  
anavezet? Bremañ e ro dimp e c'her diwezhañ: e Gonz a zeu da ve-  
zañ dremm, dremm Jezuz e dest feal.

Nedeleg - Oferenn an deiz

- 2\* LENNADENN Doue en deus konzet ouzhip dre e Vab en em c'hlaset den  
LENNADENN EUS AL LIZHER D'AN HEBREED 1. 1-6
- 1 Pa gomzas Doue gwechall ouzh hon Tadoù e reas a-damnou niverus  
hag e kalz a stummoù, dre ar Brofeded.
- 2 Met en deizioù diwezhañ-mañ e komzas ouzhip dre ar Mab  
en deus lakaet da hêritour war an holl draoù;  
drezañ en devoa ivez krouet ar bed-holl.
- 3 Hemañ eo ar sked eus e c'hloar hag ar skeudenn eus e natur, (anien)  
souten a ra pep tra dre e gomz nerzhus,  
ha goude bezañ graet ar pezh a oa ezhom da c'hланаат ar pec'hedoù  
aet eo da azezañ en tu dehoù d'an Doue Meur e lein an neñvoù;  
ha savet ez eo pell bras. a-us d'an Aeled evel m'eo kalz uheloc'h  
ivez eget o anv an hini en deus resevet evel hêrezh. (Iheruzalem)
- 5 Rak da behini eus an Aeled en deus biskoazh Doue lavaret :  
« Va Mab ez out. Me eo am ees da c'hlanet hiziv ?  
Pe c'hoazh :  
« Me a vo evitañ un Tad hag eñ a vo evidon ur mab. »
- 6 Pe c'hoazh, pa zegas er bed an Hini Kentañ-Ganet, e lavar :  
« Ra zeuio holl Aeled Doue d'e adoriñ. »

ALLELUIA

Alleluia ! Alleluia.  
Un deiz santel a lugern evidomp : deuit, pobloù da azeuliñ an Aotrou.  
Rak hiziv ez eus bet diskennet ur sklerijenn war an douar.  
Alleluia !

- PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 1. 1.6.9-14
- 1 Er penn-kentañ edo ar Verb hag ar Verb a oa gant Doue  
ha Doue e oa ar Verb.
- 2 Bez'e oa er penn-kentañ gant Doue.  
3 Drezañ eo bet graet pep tra,  
hag heptañ n'eus bet graet netra.
- 4 Ar pezh a zo bet graet ennañ a oa buhez,  
hag ar vuhez-se a oa sklerijenn an dud.
- 5 Hag ar sklerijenn n'he deus ket he dalc'het.  
9 Ar sklerijenn, an hini wirion hag a sklaera pep den,  
a oa o tonet er bed.
- 10 Er bed edo, hag ar bed a zo bet graet drezañ  
met ar bed n'en deus ket e anavezet.
- 11 Deuet eo en e dra,  
met e dud n'o deus ket e zegemeret.
- 12 Met da gement hini en deus e zegemeret, en deus roet galloud  
da vezañ bugel da Zoue, d'an neb a gred en e anv.
- 13 Eñ ha n'eo ket bet ganet eus ar gwad, nag eus youl ar c'horf,  
nag eus youl an den, met eus Doue.
- 14 Hag ar Verb a zo deuet da vezañ korf (den) ha bet o chom en hon touez  
ha gwelut hon eus e c'hloar,  
gloar o tont dezhañ eus e Dad, evel Mab Unganet,  
lein e c'hras hag a wirionez.

war ar profoù- Ra blijo deoc'h, Aotrou Doue, hor brofadenn, er Gouel bras-mañ, pa z  
eo deuet ho Mab er bed evit kinniq deoc'h an aberzh hon eus dre-

Nedeleg - Oferenn an deiz

zañ ar silvidigezh hag ar peoc'h ganeoc'h-c'hwil hag a ro tro dimp d'hoc'h azeu-  
liñ ervat. Dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

rak-kanenn-veur- prefas Nedeleg - gwelout pajenn 3

goude keduniñ- Doue madelezhus, setu hor pedenn bremañ: Salver ar bed, hiziv, a ro  
dimp galloud da vezañ ho puyale, ra zegaso dimp ivez road (dône-  
zon) ar vuhez divarvel. Eñ, hon Doue bev, a-holl-viskoazh da virviken. Amen!



ikonenn ar Ginivelezh  
hervez-treset gant Klara Walkrecq eus Kloastr-Sant-Tegoneg

Gouel Santez Mari, Mamm Doue - d'ar c'hentañ a viz genver

kempedenn- Aotrou Doue, dre ar Merc'hez Vari deuet da vezañ Mamm, hoc'h eus roet da ouenn an dud gras ar silvidigezh peurbadus. Grit ma santimp anezhi oc'h alvokadifi evidomp, hi hag hon eus degemeret drezi Krouer ar vuhez, Dre lennadenn gentañ- An deiz-mañ, ma hetomp an eil d'egile ur bloavezh mat ez omp pedet da lavarout gant feiz an eil d'egile ar bennigadur desket gant Doue-E-unan da m-Voizez.

1an LENNADENN

6. 22-27  
An Aotrou Doue a gomzas ouzh Moizez hag a lavaras dezhañ :  
Komz ouzh Aaron hag e vibien ia lavar dezho :  
Setu arnañ penaos e vennigo Bugale Israel. Lavarout a reot dezho :  
An Aotrou Doue d'az pennigo ha d'az tiwallo  
An Aotrou Doue da lakaio e Zrenn da lugerni warnout  
ha da raio drugarez ez keñver.  
An Aotrou Doue da lako e Fas da sevel war-zu ennout  
ha da roio dit ar peoc'h.  
Evel-se eo e lakaint va anv war Vugale Israel  
ha me a skuilho va bennozh warnezhe.

SALM 66 2-3, 5, 6 & 8

R (2a) Doue da gaout ouzhip truez  
Ha d'hor bennigañ.  
2 Doue da gaout ouzhip truez ha d'hor bennigañ  
Ra lugernio seder e zrenn warnomp  
3 Ma vo anavezet e Lezenn war an douar  
Ha dre an holl vroioù e silvidigezh.  
5 Joe ha levezet d'an holl vroioù  
Dre ma renit ar pobloù gant Justis  
Ha ma c'houarnit ar broioù  
War an douar.  
6 Ar pobloù d'ho meulo, Aotrou Doue !  
An holl bobloù d'ho meulo !  
8 Doue d'hor bennigo  
An douar a-bezh d'e zoujo !

eil lennadenn- Setu ar c'hoshañ testenn variel anavezet ganiap. Berrger eo Paol en abeg ma veve morvoast c'hoaszh ar Merc'hez, d'ar mare ma skriva

2\* LENNADENN

Doue en deus degaset e Vab, ha ganet eo bet gent ur vourc.  
LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA GRISTEMION C'HALATIA 4. 4-7  
Breudeur !  
4 Pa eo deuet da benn an amzer verket, en deus Doue degaset  
e Vab ganet eus ur vaouez, ganet dindan al Lezenn  
evit dasprenañ ar re a oa dindan al Lezenn,  
dimp da vezañ kemeret gent Doue evel mibion.  
6 Dre me'z oc'h mibion dezhañ, en deus Doue kaset Spered e Vab  
en ho kalonoù, ha goude ha ra ar Spered-se : « Abba ! Tad ! »

Gouel Santez Mari, Mamm Doue - d'ar c'hentañ a viz genver

Neuze' ta, evit sklavour ne dout ken, net mab-an-ti,  
7 ha mar dout mab-an-ti ez out ivez heritour dre c'hras Doue.

ALLELUIA

Alleluia, Alleluia.  
E meur a stumm e komzas gwechall Doue ouzh hon Tadoù dre ar Broded  
En deizioù diwezhañ mañ en deus komzet ouzhip dre e Vab.  
Alleluia !

AVIEL

Kaout a rejont Mari ha Jozef hag ar Bugel. Eizh deiz goude e rojont  
d'ar Bugel an anv a Jezuz.  
PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 2. 16-21  
16 En amzer-se ez eas ar bastored, mall warno betek Betlehem,  
hag e kavjont Mari ha Jozef hag ar Bugelig gourvezet er prazeb.  
17 O welout se oc'h anavezjont ar wirionez eus ar pezh a oa bet lavaret  
dezho diwar-benn ar Bugel-se ;  
18 ha kement hini o c'hlevas a voe sebezet gant ar pezh  
a gonte ar vesaerien dezho.  
19 Mari avat, a vire an holl draoù-se hag a brederie warno en he c'hialon.  
20 Neuze ez eas ar vesaerien en-dro, en ur reiñ klod ha meuleudi da Zoue,  
evit kement o devoa gwelet ha klevet,  
hervez ma oa bet lavaret dezho.  
21 A-benn an eizhvet deiz merket evit an d'roc'hañ ar Bugel,  
e voe roet dezhañ an anv a Jezuz, evel ma-oua bet anvet gant an Ael  
a-rank bezañ koñsevet gant e van.

war ar profoù- Aotrou Doue, ganeoc'h, en ho madelezh, e vez bouc'het ha peurechu-  
et pep tra vat. Ni ho ped eta, p'emaomp el levezet gant gouel  
Mamm Doue: koulz ha maz omp laouen gant ho kras en he road (donezon) kentañ,  
grit ma vimp elrus, pa vleunio en he c'haerañ. Dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen!  
rak-kanenn veur- E gwirionez, reizh ha santel eo Tad santel, Aotrou Doue holl-  
c'halloudek ha peurbadel, ho trugarekaat e pep lec'h hag e  
pep amzer. Ha, gant Gouel ar Merc'hez gloriuz Vari deuet da vezañ Mamm da Zoue,  
kanañ deoc'h meuleudi, gloar ha bennozh.  
Hi he deus, dre nerzh ar Spered Santel, koñsevet ho Mab unganet, hag en ur virout  
an enor da choa gerc'hez, he deus roet d'ar bed ar sklerijenn peurbadel, ar Sal-  
ver Jezuz, hon Aotrou. Drezañ eo, Tad Santel, ez oc'h meulet gant an Ael hag an  
holl Sent, ha ganto e fell dimp unaniñ hor mouezhioù, en ur lavarout a-greiz ka-  
lon:

goude keduniñ- Laouen omp, Aotrou Doue, o vezañ degemeret ar Sakraant eus an  
Neñv. Grit, ni ho ped, ma touge frouezh ennoomp evit ar vuhez  
peurbadus. Ni hag a blij ganiap diskleriañ, en hor feiz, ez eo ar Merc'hez Vari,  
Mamm d'ar Salver, ho Mab, ha Mamm an Iliz. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou. Amen!



kempedenn- Doue hollc'halloudek ha peurbadel, splannder an eneoù o deus ar feiz, plijet ganeoc'h, en ho madelezh, kargañ ar bed gant ho kloar, hag en ziskouez d'an holl bobloù, dre ar sked eus ho sklerijenn. Dre Hor Salver.....

kentañ lennadenn- E kreiz an noz, e don diskar politikel ha relijiel e bobl, ec'h embann an diouganer amzervezh ar geoded gweladennet gant Doue. Jezuz eo, evidomp, ar weladenn-se.

#### 1<sup>an</sup> LENNADENN

Gloar an Aotrou Doue a zo savet warnout !

LENNADENN EUS LEVR AR AR PROFED IZAIAS

- 1 Sav, lugern, o Jeruzalem, rak deuet da sklerijenn ha savet eo warnout gloar an Aotrou.
- 2 Emañ an denvalijenn o c'holeiñ an douar, hag an noz du ar bobloù ; met warnout-te e sav an Aotrou ha warnout-te en em ziskouez e c'hloar.
- 3 Ar broioù a gerzho ouzh da sklerijenn hag ar Rouaned ouzh sklaered da c'houlou-deiz.
- 4 Sav da zaoulagad ha sell en dro dit : emañ an holl o'n em vodañ hag e teuont daved out ; dont a ra da vibion a-ziabell ha da verc'hed a zo douget war an divrec'h.
- 5 Neuze e weli hag e vi lugernus, tridal e raio da galon gant al levenez, rak war-zu ennout e troio teñzorioù ar mor ha betek ennout e teuo pinvidigezh ar broioù.
- 6 Beuzet e vi gant bagadoù kañvaled, gant dremened Madien hag Efa ; donet a raio holl dud Saba en ur zegas ganto saour hag ezañs hag en ur ganañ meuleudioù an Aotrou Doue.

SALM 71 2. 7-8. 19-11. 12-13

R (11) Dirazoc'h, Aotrou, e stouo  
Holl bobloù an douar.

- 2 Doue, roit d'ar roue ho skiant evit barn Hag ho spered a justis da Vab-ar-Roue.
- 7 Bleunia ray en e amzer ar justis, Hag e vo kalz a beoc'h keit ma pado al loar.
- 8 Mestr a vo eus an eil Mor d'egile Hag eus ar Ster-Vras betek harzoù an douar.
- 10 Rouaned Tameiz hag an Inizi profoù a zegaso, Rouaned Arabia ha Saba a zeuio donezonoù ganto, Hag e stouo dirazañ an holl Rouaned An holl bobloù e servijo.
- 12 Salviañ 'raio' ar paour o krial, Hag an den kaezh hep sikour ;
- 13 Truez en devo ouzh an ezhommeg hag ar paour, Eus eneoù ar beorien e vo ar Salver.

#### Epifaniezh an Aotrou - 8 genver

eil lennadenn- Evit ar Yuzev Paol, ar m-Vajed a zo paganed. Met galvet int ar ar baganed da zizoloñ ez eus gant Jezuz Krist ur gomz hag a ya dreist ar c'hlovedoù kenelek (ethnique) ha sevenadurel. E Jezuz, Aviel Doue a zo kemennet d'an holl.

#### 2<sup>a</sup> LENNADENN

LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA GRISTENIEN EFEZOZ 3, 2-3a. 5-6

- 2 Breudeur ! Klevet hoc'h eus, a gredan, diwar-benn an donezon-se a c'hras Doue hag a zo bet fiziet ennon evidoc'h ;
- 3 ha penaos ez eo dre ziskuliadur ez eo bet roet din me da anaout ar mister-se emañ o paouez diskleriañ deoc'h ;
- 5 ur mister eo ha ne oa ket diskleriet da dud an amzer dremenet, evel m'eo diskuliet bremañ d'e Ebestel Santel ha Profedet er Spered ;
- 6 da lavarout eo, ar Baganed a zo heritoerien asamblez ganimp, izili an hevelop korf, ha lodek en hevelop Promesa er C'hrist Jezuz, dre berzh an Aviel.

#### ALLELUIA

Alleluia, Alleluia !

MZH 2.2

Gwelet hon eus e steredenn o sevel  
Hag ez omp deuet da azeuliñ an Aotrou.  
Alleluia.

#### AVIEL

Deuet omp eus bro ar Sav-Heol da rentiñ enor d'ar Roue.

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT VAZHEV 2, 1-12

- 1 Goude ma oa bet ganet Jezuz e Betlehem Youda, en amzer ar roue Herodez, setu Majed eus ar Sav-Heol oc'h erruout e Jeruzalem, hag o lavarent :
- 2 « Pelec'h emañ ar bugel a zo ganet da vezañ roue ar Yuzovien ?  
Rak gwelet hon eus e steredenn o sevel,  
hag ez omp deuet da rentiñ enor dezhañ. »
- 3 Hogen ar roue Herodez, ja glevas, a voe strafuilhet ha  
ker-Jeruzalem a bezh war un dro gantañ.
- 4 Bodañ a roas an holl Veleien-Vras ha Skribed ar bobl,  
hag e c'houlennas digante  
« E pelec'h e tle ar Mesiaz bezañ ganet ? »
- 5 Ar re-mañ a respontas dezhañ :
- 6 « E Betlehem Judea, rak evel-hen ez eo bet skrivet gant ar Profed :  
Ha te, Betlehem, douar Youda, ne dout tann ebet an disterañ  
e-touez keriou bras Youda, rak ak 'hanout-te e teuo ur Rener  
hag a vo Pastor va fobl Israel. »
- 7 Neuze Herodez o vezañ galvet e-kuzh ar Vajed, a c'houlennas  
gant evezh diganto e pe amzer e oa en em ziskouezet ar steredenn ;  
hag ouzh o c'has da Vellehem e lavaras :
- 8 « Kit war-raok, ha goulennit gant evezh diwar-benn ar Bugel-se,  
ha pa ho pezo e gavet, degasit ketoù din,  
ma'z in me ivez da rentiñ enor dezhañ. »
- 9 Hag ar re-mañ goude bezañ klevet ar roue, e yeas gant o hent.  
Ha setu ar steredenn o devoa gwelet o sevel, a oa en o raok,  
betek ma oa deuet d'en em lakaat a-us d'al lec'h m'edo ar Bugel.

Epifaniezh an Aotrou - 8 genver

- 11 Pan antrojont en ti, e kavjont ar Bugel gant Mari e vann, hag o strouñ d'an douar e rentjont enor dezhañ, Hag e vezañ digoret o zenzorioù, e kinnigjont dezhañ profoù, aour, ezañs ha mir.
- 12 Met keloù a zeus dezho a-berzh Doue dre o c'houk da chom hep distreiñ davet Herodez, ha dre un hent all e tistrojont d'o bro.

war ar profoù- Sellit, gant madelezh, Aotrou Doue, ouzh profoù hoc'h Iliz: n'eo ket mui aour, ezañs, na mir hon eus da ginnig, met an Hini a zo skeudennet ganto, bremañ roet deoc'h e-giz aberzh ha roet dimp d'hor magañ, Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

rak-kanenn-veur - prefas Epifaniezh an Aotrou - Reizh ha santel eo, e gwirionez, un dra dleet ha talvoudus, ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep awer, c'hwil, tad santel, Aotrou Doue hollc'halloudek ha peurbadel. Rak ho Mab un-ganet, dre en em ziskouez er bed-mañ, gant hon natur marvel, en deus degaset dimp kaeroc'h buhez, dre ur splannder nevez eus e natur divarvel a Zoue. Rak-se unanet gant an Aeled hag an Arc'haeled, ha gant holl Speredoù eUrus an nefoù, ni a gan d'ho kloar ar veuleudi, en ur lavarout da viken:

goude keduniñ- Ho pediñ a reomp, Aotrou Doue, ... lakit ur sklerijenn eus an Nefiv da barañ dirazomp bepred hag e pep lec'h, evit ma tigoro hor spered da anaout ervat Sakramant an Aoter ho peus roet dimp perzh ennañ, ha ma vo gwir garantez en hor c'halon ouzh e resev. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou. Amen!



un Doue eo  
hag e c'hell  
an holl  
stekin  
outañ...

Eil sul war ar bloaz - K - 15 genver

kanenn mont-tre- War ur gador-veur uhel e welis, en e goazez un Den hag a vez a-zeulet gant armead diniver an Aeled a gan a-unan ar ganenn-mañ Setu an Hini a bad e Rouantelezh da virviken.

kempedenn- Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, selaou gant madelezh goulennoù ho Pobl a zo ouzh ho pediñ. Roit dezho ar c'hras da welout ar pezh a zo da ober, hag an nerzh da ober ar pezh o devo gwelet. Dre hor Salver Jezuz Krist...

lennadenn gentañ- Breudeur, selaouit gant pebezh karantez e kar Doue e bobl. N'eus ehan ebet evitañ keit ha ma ne vezo ket distro Jeruzalem davetañ.

1an LENNADENN

Karantez an Aotrou Doue evit e bobl Israel hag evit Mèr-Sion (Jeruzalem) a zo heñvel ouzh karantez un den evit e bred.

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED IZAIAS

62, 1-5

- 1 Abalamour da gêr-Sion, ne davin ket, hag abalamour da Jeruzalem ne elhanin ket, ken na vo gwelet he Justis o parañ evel gouloù-deiz, hag he silvidigezh evel un fantad-tan.
- 2 Nouze e welo ar Broadoù da justis, hag an holl Rouaned da splannder, hag e vo roet dit un anv nevez diskleriet gant genoù an Aotrou Doue.
- 3 Boz'a vi'ur gurunenn holl haer e dorn an Aotrou, un daladenn-roue e dorn da Zoue.
- 4 Ne vo mui lavaret diwar da bonn: «An Hini Dilezet» ha da vro ne vo mui anvet: «Distrujet met graet e vo pc'hanout «Va Flijadur Enni», ha da zouar «Plac'h an Eured», rak an Aotrou Doue a lakajo e blijadur annout, ha da zouar en dovezio ur priad.
- 5 Evel ma timez un den yaouank d'ur plac'h yaouank, evel-se e timezo da Arkitektour ganit, hag evel ma'z eo ur wreg yaouank levenez he fried, evel-se e vi levenez da Zoue.

Noter: 3b: un daladenn-roue (pe) ur seizenn-bonn-roue.

SALM 95

1-2a, 2b-3, 7-8a, 9-10&c

R 3 Kontit gloar Doue d'ar Pobleù, D'an holl vroioù, e oberoù burzhelus.

- 1 «Kanit d'an Aotrou ur c'hantik nevez Kanit d'an Aotrou, Douar a bezh, Kanit dezhañ, meullit e anv.
- 2b Brudit a zeiz da zeiz ez eo Hor Salver.
- 3 Kontit e c'hoar d'ar Pobleù, D'an holl vroioù e oberoù burzhelus.
- 7 Roit d'an Aotrou, c'hwil, familhoù ar Pobleù, Roit d'an Aotrou gloar ha galloud, Roit dezhañ gloar e anv.
- 8a Stouit dirak an Aotrou gant gwiskamantoù-sakr, Krenit dirgañ, Douar a-buzh!

Eil sul war ar bloaz - 15 genver

10e Lavarit e-louez ar broioù : an Aotrou a renl  
Gouarn a ra ar Poblou gant lealded.

eil lennadenn- Annezet gant an hevelep Spered ez eo bet degemeret ganiap roadou  
(donezonou) disheñvel. Bez ez eo evit sevel a-gevret Korf ar C'hrist.

LENNADENN EUS LIZHER KENTAN SANT PAOL DA GRISTENIEN GORINTOZ 1 Kor. 12.4-11

- Broudeur I**
- 4 Meur a seurt grasou a zo,  
met n'eus nemet ur Spered hepken.
  - 5 Bez'ez eus ivez meur a seurt servijou, met an hevelep Aotrou eo.
  - 6 Bez'et eus meur a seurt oberou,  
met an hevelep Doue eo hag a ra pap tra en holl.
  - 7 Met da bep hini e vez roet an donezon da ziskouez ar Spered evit nmd an holl.
  - 8 Rak da unan, dre ar Spered (Glan) e vez roet donezon ar fiñvez,  
ha d'unan all donezon ar ouizlegezh, hervez an hevelep Spered.
  - 9 D'unan all ar Feiz, gant ar memes Spered, ha d'unan all an donezon  
da yac'hañ, dre ar Spered n'eus nemetañ;
  - 10 d'unan all ar galloud da ober turzhudoù,  
d'unan all donezon ar brofesi  
d'unan all ar c'hras da anaout ar speredou mat diouzh ar re fall,  
d'unan all an donezon da gomz meur a yezh,  
ha d'unan all ar galloud d'o diskleriañ.
  - 11 Met an holl donezonou-se a zo labour ar Spered n'eus nemetañ,  
an hevelep Spered, a rann anezho dre reiñ hini pe hini da bep unan,  
hervez ne plij dezhañ.

AVIEL

Burzhiad kentañ hor Salver graet en un eured : Eured Kana.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 2. 1-12

- 1 En amzer-se voo un eured e Kana, e Galilea,  
hag e oa mamm Jezuz eno.
- 2 Pedet e voo Jezuz ivez d'an eured hag e ziskibien gantañ.
- 3 O vezañ ma oa aet berr ar gwinn, e lavaras mamm Jezuz dezhañ :  
« N'o deus ken a winn »
- 4 Ha Jezuz a respontas dezhi :  
« Maouezl petra a ra-se? N'eo ket deuet c'hoazh va eur. »
- 5 Lavarout a reas e vanm d'ar re a oa o servijiñ :  
« Grit komant a lavaro deoc'h. »
- 6 Bez'eo oa ano c'hwec'h pod-nuen a dalveze d'ar Yuzevien d'en em walc'hiñ  
hervez o glizioù gouest pep hini da zerc'hel daou pe dri muzuliad.
- 7 Lavarout a eure Jezuz dezho :  
« Kargit a zour ar podou-se. »  
Hag int d'o lakaat berr.
- 8 Hag e lavaras dezho :  
« Tonnit diouto bremañ da gas da vestr ar banvez. »  
Hag e rejont.
- 9 P'en devoe mestr ar banvez tañvaet an dour troet e gwinn  
ne ouie ket a belec'h e toue, ar servijerien avat hag o devoe tonnet an dour,  
e ouie - e c'halvas an ozhoc'h yac'hañ hag e lavaras dezhañ :

Eil sul war ar bloaz - K - 15 genver

« Komant den 'zo ara da gantañ servijiñ ar gwinn mat, ha pa vez orru tonnet  
d'an dour, hini distroc'h; te avat, ac'h eus miret ar gwinn mat betek vremañ. »

11 Hennañ eo a voo ar pen-kentañ oüs sinitou Jezuz, an hini a reas e Kana  
Galilea; evel-se e ziskouezas e c'hloar hag e krodas ennañ o ziskibien.

war ar profou - Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, degemerout ar brofadenn e-  
mañ ho pobl o kinnig deoc'h, ha grit ma tegaso dimp santelezh ha  
ma roio dimp ar pezh a c'houlennomp gant deoliezh. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou;

rak-kanenn-veur - prefas suliou ar bloaz I - E gwirionez, Tad santel, Doue holl-  
c'halloudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugareka-  
at e pep lec'h hag e pep amzer, dre Jezuz Krist, hor Salver. Eñ hag en deus gant  
mister e bask kaset da benn un oberenn vurzhus, hon tennañ eus sklavelezh ar  
pec'hed hag ar marv, evit hor gervel da gaout perzh en e c'hloar hag en e vuhez.  
Ha bremañ, e c'hellomp dougen anvioù dispar: pobl dasprenet, pobl dibabet, broad  
santel a rouaned hag a veleion. Hag ec'h embannomp e pep lec'h oberou kaer ho  
kalloud, c'hwi hag hoc'h eus hon lakaet da dremen eus an deñvalijenn d'ho skle-  
rijenn. Rak-se, unanet gant an Aeled hag an Arc'haeled ha gant holl Speredou  
galloudus an Neñvoù, e kanomp meuleudi d'ho kloar, en ur lavarout da viken:

antifonenn ar c'heduniñ - Deuet on evit m'o devezo ar vuhez ha ma o devezo ane-  
zhi puilh, eme hor Salver. Yann 10.10

goude keduniñ - Ho pediñ a reomp a-greiz kalon, Doue hollc'halloudek; d'ar re a  
nerzhekait gant ho misterioù santel, roit ar c'hras d'ho servi-  
jañ evel ma tere, gant oberou a vuhez. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou, Amen!



Bez e vi  
ur gurunenn hollgaer  
e dorn an Aotrou,  
un daledenn-roue  
e dorn da Zoue...

Izaiaz



## Arvestomp ouzh ikonenn ar Ginivelezh...

Puilh eo ar gelennadurezh a zo en ikonenn-se ha bez e c'hell sklerijen-nafi, evidomp, mister an Emzenadur.

- An toull du- Un toull kleuzet en douar. E-giz ur bez eo treset ar c'hraou. Ar Mab en em c'hra glen. Diskenn a ra rez-ha-rez gant an den evit ma c'hello an den pignat rez-ha-rez gant Doue. An Adam nevez en em c'hra douar evit salviñ an Adam kozh graet gant douar. En em ober a ra bugel-den evit ma teuio an den da vezañ bugel-Doue, evit adober e pep den ar skeudenn a Zoue maz eo, an ikonenn dilufret gant ar pec'hed.

- Ar Mabig Jezuz- "Mailhuret eo gant Mari." Lurelloù a zo tro-dro dezhañ, evel pa vije bet endev sebeliet. Ya, amañ emañ "Den ar glac'harioù" diouganet gant Izaiaz. War un aoter-maen ez eo astennet ar babig. Aoter an aberzh dre garantez. Difiñv eo ar bugel, difiñv an Hini a zo staget ouzh ar c'hoad. Bepred dic'hal-loud, bepred emzilezet.

- Mari- Gourvezet emai pe damazezet. Evel ur vaouez o wilioudiñ. Dalc'hmat an hevelep kentel: peurwir eo ez eo ganet Doue gant ur vaouez. Gant un dorn e tiskouez ar Bugel. Kinnig a ra he Mab, o pediñ an dud d'en em stagañ outañ. Ha tro-et eo war-du Jozef, anezhañ skeudenn an denelezh a-bezh.

- Jozef- A-zehoù, emañ, a-gostez, pellaet, rak n'eo ket eñ tad naturel ar c'hrouadur-se. Ouzhpenn-se ez eo dilaouen, rak taolenniñ a ra diskredoni an dud dirak an Enkorfidigezh.

- Satan- War-dreuz emañ an hinienn-se; o vezañ an tempter e kuzh e zremm. Broudañ a ra da arvariñ. Hogen bugel Betleem a zo gwir den ganet gant Mari ha gwir Doue, Mab da Zoue. Ma tisplegomp, e doare pe zoare, ned eo Jezuz nemet un den pe un Doue nemetken, dezhañ nemetken un neuz a zen, emañ ganimp ar gwashañ eus an dizivoudoù, ar gwashañ eus an enepkredennoù relijiel. Sammet en deus Doue hon natur-ni, dimp da c'hallout tizhout hec'h hini. Ma n'eo ket Eñ Doue a-grenn ha Den a-grenn, ned omp ket salvet. An den ne c'hell ket salviñ an den. Hag an diaoul a fell dezhañ en em gollfe an den. Setu perak e ki ouzh ar Mister-se. Diskuilhet eo avat gant an ikonenn, pezh a lam digantañ e startijenn.

- Ar Grouadelezh- Treuzfurmet eo an Natur. Sklerijenn a zo war ar reier. Bec'hi-et eo ar gwez a vleunioù hag a frouezhennoù. N'eus ket a noz.

- An tri bann- War ar Babig e tiskenn tri bann. Se eo klod Doue. An teir Hinienn en em ro da welout. E Jezuz, Doue a bezh en em ro. Adal Ne'deleg, n'emañ ket mui an den e-unanik-penn gant e bec'hed. Mont a ra e-barzh buhez an Drielezh, muioc'h c'hoazh eget da zeizioù ar Grouidigezh; bez e c'hell daremprediñ an Tri.

- An aeled- Int-i a azeul ar c'hlod-se; ael an tu dehoù a zo ur ouel gantañ war e zaouarn, e-giz arouez a gehelerezh. Ganto eo graet lez an Nefiv, lez an Aotrou Doue.

- Ar vesaerion- A-gleiz, en traoñ, gant ar bastored eo graet lez an Aotrou Krist, war an douar. E pep lec'h ez eus meuleudi: an nefiv hag an douar a zo laouen gant Donedigezh ar Salver. Al loened zoken a gemer perzh er veuleudi-se, en azeulerezh-se. An hini krouer a anavez an Hini krouer.

- An div amiegezh- En traoñ, a-gleiz. Emaint o walc'hifiñ ar babig. Gwalc'het eo evel pep mabig-den o tont er bed. Kement-mañ adarre da lavarout ez eo-Eñ ur gwir den. Krouidigezh an den. Ouzhpenn-se, emañ etre o daouarn evel pa vije bet ur c'horf distaget eus ar groaz. Dasprenidigezh an den.